

Raktres c'hoariva KEAV 2020

✓ *Ar c'horf hag ar vouezh*

A-raok kregiñ da c'hoari e ranker kemer amzer da zistignañ ar c'horf. Er vuhez pemdeziek e vez lakaet bec'h war an den, war e gorf. Neuze e vo kemeret amzer da sioulaat ha da selaou ar c'horf dre bleustradegoù Qi Gong evit mont e darempred gant hon diabarzh deomp-ni. Peurechuet e vo al labour gant ar c'horf a-drugarez d'an dañs a sikouro ac'hanomp evit kaout skiant eus an egor tro-dro deomp hag eus korfoù an dud a vo a-gevret ganeomp-ni war al leurenn.

Pouezus-kenañ eo alaniñ mat. A-drugarez d'an alan e c'heller implijout mat ar vouezh hag ar c'horf.

✓ *Ar c'hoariva-skeudenn (le théâtre image)*

Ar c'hoariva skeudenn a sikouro pep hini da vezañ en e aes war al leurenn, da c'hoari da vat ar pezh a zo don en e galon, da vezañ prest da santout ar fromoù, da vezañ war evezh e pep mare ha da vezañ kad da c'hoari war ar prim. Pleustradegoù a vo diazezet war an alan, ar selaou hag ar selloù.

✓ *Ar skritur*

Kemeret a vo un istor ha skrivet a vo an divizoù ijinet ganeoc'h. Pep hini a c'hall lavaret ar pezh a zo don en e galon. Al labour gant ar c'horf, gant ar vouezh a vo un digarez da bep hini da ijinañ ha da skrivañ an divizoù.

Ul labour a-stroll eo ar c'hoariva : ober anaoudegezh gant ar re all, kemer plijadur, ha kaout doujañs dreist pep tra. Ret a vo dont bemdez ha chom betek ar Gwener noz evit an abadenn.

Petra zo da zegas ?

- Dilhad bemdez sklaer pe gant livioù : bragoù pe sae pe vroz, hiviz pe roched pe tee shirt, un tog, danvez, ha dafar a bep sort. Lakaet a vo an dilhad-se asambles evit ober ur gwiskva a-stroll.
- Botoù du skañv pe botoù dañs,
- Un tapis, ur c'haier hag ur c'hreion.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh un tem ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.